

KIS-565 – An idol hag an ikon hervez Jean-Luc Marion

(GE – 22 12 97)

Jean-Luc MARION¹, en e bennad “L'idole et l'icône”², a gemer da zivoud ar monet etrezek an doueel, oc'h ober eus ar monet ur sellout kent pep tra. Keñver ha keñver e lak an idol hag an ikon, nann e ser kevenebiñ paganiezh ha kristeniezh diouzh savboentoù kevredadel pe zoken teologek, met dre zisheñvelaat daou sellout kendaveat a-getep d'an idol ha d'an ikon. E berr, emañ ar c'hemm etre an daou seurtad selloù en o derez trebarzhusted : sell an idoler o chom a-bann dirak e idol, beziad a zo bet trellus a-walc'h da lakaat fin d'e hent, sell an den a feiz o treizhañ didrell bed ar beziadoù betek ma teu war arbenn dezhañ ar sell doueel dre zaoulagad an ikon.

Kent mont pelloc'h e rankan stabiliañ an hanc'herieg a arverin.

~ Br. *an doueel*. Amañ evel e lec'h all n'eur ket evit tremen hep pennanvaat an adanv. Ar c'hevatal da Gl. *le divin*, Al. *das Göttliche* ned eo nag (*an*) *d/Doue* nag *an doueelezh*, met *an doueel*.

~ Br. *arrizh*. Endra viran *idol* en e ster kevredadel ha kravezel strizh, e tegasan da dermen hollek *arrizh* g. (hBr. *arrith* « penace .i. imago pulcherrima », sl. DGVB. p. 74), tre diouzh ar meizadur en deus J.- L. MARION : “l'idole éblouit de visibilité” (I&I, p. 19). Ober a ra ivez gant *idolâtre* da aroueziñ an hini ned a ket pelloc'h eget an *idol*, an *arrizh* en e glask d'an doueel. Evel ma'z eur boas d'ober gant Br. *idoler* e ran gant *arrizher*. Betek *arrisheiat/d* ez an avat pa'z eus anv eus "saver an arrizh".

~ Br. *arlun*. Heñvel dra, mar dalc'han d'ober gant *ikon* er c'hemperzh istorel ha relijiel, e ran gant *arlun* g. (evel er Stlenneg a-du-rall) evit ar c'heal hollek : al *lun*

¹ Prederour ganet e 1946, aozer da lies studienn war DESCARTES (*Sur l'ontologie grise de Descartes*, Vrin, 1975 ; *Sur la théologie blanche de Descartes*, P.U.F., 1981, *Questions cartésiennes*, P.U.F., 1991, etc.), da imbours'hioù war an Anadennoniezh (*Réduction et donation. Recherches sur Husserl, Heidegger et la phénoménologie*, P.U.F., 1989), war ar gravez hag ar Gristeniezh (*L'idole et la distance*, Grasset, 1977 ; *Dieu sans l'être*, Fayard, 1982 ; *Prolégomènes à la charité*, Éd. de la Différence, 1986). A-du-rall ez eo atebeg d'ar gelaouenn *Communio*.

² An destenn “L'idole et l'icône” a zavean dezhi en notenn-mañ (ouzh he zeskanviñ I&I) a ra pennad kentañ eil embannadur *Dieu sans l'être*, P.U.F., 1991, pp. 15-37.

eo ma treizh *warnañ* ar sell da vont pelloc'h etrezek an diwel ez eo eñ an hañval hewel anezhañ evel ma ra, pep hini en e were, an *arvan*, an *arouez*, an *arhent*, an *argel*, h.a.

~ Br. *dazhentiñ*. Korvo a dennan eus ar c'hemmoù kemplezh a stader, bep ma tiorre ar yezh, o tispakañ hervez ur skalfad durc'hadurioù ledan etre an deveradoù ketep dre *az-* ha dre *daz-* (kv. *askor–daskor*, *astreiñ–dastreiñ*, *azgwel–dazgwel*, *azlamm–dazlamm*, *azloc'h–dazloc'h*, h.a.) evit kinnig, e-kichen *azhentiñ* "degemer ha kas pelloc'h gant an un furm", *dazhentiñ* "azlakaat en hent forzh pe gemm a ve d'ar furm".

~ Br. *drec'h* g. A-gevel gant *melezour* e ran gant *drec'h*, n'eo ket hepken evit staliañ loazioù ar brezhoneg. Fellout a ra din merkañ n'emañ ket pell an arc'hwel deskrivet evel piaou an arrizh diouzh kealioù lakanek an "drec'hel" ha "pazenn an drec'h" (sl. GBLF. ¶¶ 570 & 1254) goude d'an aozer ober an tav war hevelep nested.

~ Br. *erdant* g. J.-L. Marion a denn korvo paoterek eus kerentiad an termenoù Gr. **ei'dw*, *ei'dwlon*, La. *v''(de(o)*, Gl. *voir*, *visible*, *viser*, *visée*, *visible*, *invisible* hep mont hebiou d'o lies kemeradur — da skouer e ra gant *viser* tro ha tro e ster ar Brederouriezh hag e ster ar Vannouriezh. A-dal da **ei'dw*, *v''(de(o)*, *voir* e ran gant *gwelout* hag e zeveradoù *hewel*, *diwel* h.a., o lezel a-gostez amañ Br. *gwez* evitañ da vezañ a gendarzh gant an termenoù gresianek ha latin. Kudenn a save neoazh gant ar c'hevatalioù da reiñ da *viser*.

Er c'hemeradur ledan emañ tal ouzh tal Sz. *to aim at*, Al. *zielen*, *streben*, Br. *bukañ da/ouzh*, *erduañ da*, *amkanañ* (Br. *amkanet da*, Gl. *visant à*).

Er Vannouriezh emañ Sz. *to aim*, Al. *zielen*, *anlagen*, Br. *bizañ*, *bukañ war*, *bantañ war/enep*, *antellañ war-du*.

En Anadennoniezh, e ra HUSSERL gant *meinen*, *vermeinen* da verkañ ober an emouezañ o vont d'e ergorennoù ; troet eo bet an termen dre Gl. *viser* (a-wechoù *intentionner*) ; kinniget 'm eus Br. *ambredañ*, *bukañ ouzh*, *erduañ da*, kv. "An devezout, hervez Husserl, a c'hoarvez en e von a *vukañ ouzh* pe a *ambredañ* un ergorenn drehoutus d'ar gwezh he ampar" (KIS-346, La-08, p. 348) ; alese

	Al. <i>Meinung</i> ,	Gl. <i>visée</i> ,
Br. <i>ambred</i>		
(
<i>ad</i>),		<i>bukad</i> ,
<i>erdu</i>		
(
<i>ad</i>).		

J.-L. MARION a loc'h diwar ster anadennoniel Gl. *viser*, *visée* (hag *intention*) eleze "ambredañ anaoudel", nemet e lak ouzhpenn *warnañ* ur c'heal amprestet digant ar c'hemeradur ledan a zo "monet etrezek dre un tennder, ur stegnadur, un antelladur war-raok", o keventalañ en un doare an *ambredañ* huserlek hag an *ergerc'hañ* freudek. Alese e tegasan Br. *erdantiñ*, *erdant* (oc'h engwezhañ a-benn ar fin, daoust d'an diegi a ziskouezen e KIS-346, hBr. *tannt*, *tant* "corde tendue, passion", DGVB. p. 311).

~ Br. *reziennañ* a arveran e kemm ouzh *derc'hennañ* pa geveneb an aozer *consigner* ha *représenter* : kizeller an idol a *rezienn* ennañ an doueel ha n'en *derc'henn* ket evel ma rafe an arzour diarlunier (sl. p. 428 izeloc'h).

An aozer a gant e studi d'ar sellout e kement ma'z eus anezhañ ur c'hlask d'an doueel, ma erdant d'an doueel.

“Dre vrastresañ anadennoiezh keñveriat an arrizh hag an arlun ez eus anv enta nann eus un argraf pe unan all a genedouriezh pe a istorouriezh an arz, met eus daou vod da zec'havael an doueel. Da zec'havael pe, moarvat ivez, da zegemer.”

“En esquissant la phénoménologie comparée de l'idole et de l'icône, il s'agit donc de préciser, non telle ou telle question d'esthétique ou d'histoire de l'art, mais deux modes d'appréhension du divin, ou, sans doute aussi, de réception” (I&I, pp. 17-18).

AN ARRIZH

J.- L. MARION evit diverrañ anadennoiezh an arrizh a zigej tri foent : 1° Ar sell a stegn war-benn gwelout an doueel. 2° Penndoare an arrizh eo bezañ sellet, muioc'h : bezañ frouezh ar sell. 3° Emañ naoudigezh an arrizh e dalc'h arsav ar sell. En trede poent-mañ emañ degasadenn bennañ ar prederour.

“Lankad krennus savidigezh un arrizh n'emañ ket en e oberidigezh, hogen en e annodidigezh evel selladus, evel pezh a leunio ur sell. [...] Hewelded trellus zo dezhañ e kement ma tro ar sell outañ gant azaouez. Ne zedenn ar sell nemet e kement m'en deus ar sell e zedennet en e bezh e-barzh ar selladus, m'en erouez ha m'en divi eno. Ar sell hepken a ra an arrizh, evel arc'hwel olañ ar selladus. [...] An ambred kentañ a vuk d'an doueel, ar sell a stegn war-benn gwelout an doueel [...]. Seul c'halloudekoc'h ma tispak an erdant, seul hiroc'h ma talc'h e graf, ha seul builhoc'h, amploc'h ha rouflusoc'h ez anado an arrizh pa arsavo ar sell warnañ. Arsaviñ ar sell, ne oufed lavarout gwell : arsaviñ, herzel ur sell, ober dezhañ paouez en/war un arrizh, pa nad eo ket evit tremen en tu-hont. En kez arsav, e paouez ar sell a emzistremen, a emdrebarzhiñ, e paouez enta a drebarzhiñ an traoù hewel, evit chom a-sav war splannder unan anezho. Ar sell, pa na emdrebarzh mui, ne dreuz mui an traoù [...] ; d'un ampoent e paouez ag o anglevoud evel treuzwelus, eleze evel skañv a-walc'h a luc'h hag a glod — erfin e teu unan diwezhañ o parañ evel hewel, splann ha

goulaouus a-walc'h [...] d'e hoalañ, d'e zegerc'hañ, d'e leuniañ. Hevelep hewel kentañ a ginnigo da nep sell, a-geñver gant barr e ziraез, e arrizh. An arrizh — pe ar poent ma kouezh ar sell.”

“Le moment décisif de l'érection d'une idole ne tient donc pas à sa fabrication, mais à son investissement comme le regardable, comme ce qui comblera un regard. [...] Elle n'éblouit de visibilité qu'autant que le regard la regarde avec égards. Elle n'attire le regard qu'autant que le regard l'a attirée entière dans le regardable, l'y expose et l'y épuise. Le regard seul fait l'idole, comme ultime fonction du regardable. [...] L'intention première vise le divin, et le regard se tend en vue de voir le divin [...]. Plus la visée se déploie avec puissance, plus longtemps elle se soutient, plus riche, large et somptueuse paraîtra l'idole sur laquelle elle arrêtera son regard. Arrêter le regard, on ne saurait mieux dire : arrêter un regard, le faire (se) reposer en/sur une idole, quand il ne peut plus passer au-delà. En cet arrêt, le regard cesse de se dépasser et de se transpercer, donc cesse de transpercer les choses visibles, pour s'arrêter à la splendeur de l'une d'elles. Le regard ne se transperçant plus, ne perce plus les choses, [...] ; il ne les éprouve, à un certain moment, plus comme transparentes — insuffisamment alourdies de lumière et de gloire —, et une dernière enfin se présente comme assez visible, splendide et lumineuse, pour [...] l'attirer, le capter, le combler. Ce premier visible offrira, pour chaque regard, et à la mesure de sa portée, son idole. Idole — ou le point de chute du regard” (I&I, pp. 19-20).

Daou arc'hwel zo d'an arrizh : leuniañ ar sell gant splannder, e veleziñ — bezañ drec'h dezhañ — ha drec'h diwel.

“An arrizh a ginnig d'ar sell, gwell : a c'hourlaka outañ e hewel kentañ, forzh pehini ve, traezenn, maouez, mennoz pe doue. Diwar neuze avat, mar tizh ar sell e hewel kentañ en arrizh, e tizolo ennañ, estreget un arvest bennak, e vevenn hag e lec'h piaouel. En hevelep doare ma tiskas ar skoilh ur wagenn o reiñ d'ar c'haser kel eus al lec'h m'emañ dre e geñver ouzh ar skoilh end-eeun, e tiskas an arrizh ar sell dezhañ e unan, o reiñ dezhañ kel a bet beziad araozañ en deus trebarzhet, alese ivez e pe bar emañ pezh a dalvez, evit e erdant, evel an hewel kentañ rik. An arrizh a c'hoari enta evel ur melezour, nann evel ur poltred : un drec'h o tsvannañ d'ar sell e skeudenn pe, resisoc'h, ar skeudenn eus e erdant hag eus barr diraez e erdant. [...] An arrizh a leugn ar sell, en peurvec'h gant an hewel, en trell enta ; arc'hwel an drec'h a

steuz dre wered arc'hwel an arvest [...]. Dre ma kinnig an arrizh d'ar sell e hewel kentañ, e chom e unan drec'h diwel.”

“L'idole offre, mieux impose au regard son premier visible, quel qu'il soit, chose, femme, idée ou dieu. Mais dès lors, si, dans l'idole, le regard voit son premier visible, plus qu'un spectacle quelconque, il y découvre sa propre limite, et son lieu propre. Comme un obstacle renvoie une onde et indique à l'émetteur sa localisation par le rapport à cet obstacle même, l'idole renvoie le regard à lui-même, en lui indiquant combien d'étants, avant elle, il a transpercés, donc aussi à quel niveau se situe ce qui, pour sa visée, vaut comme le premier visible par excellence. L'idole joue ainsi comme un miroir, non comme un portrait : miroir qui renvoie au regard son image, ou plus exactement l'image de sa visée, et de la portée de cette visée. [...] L'idole comble le regard, elle le sature de visibilité, donc l'éblouit ; la fonction de miroir s'obscurcit en vertu même de la fonction de spectacle [...]. Parce qu'elle offre au regard son premier visible, l'idole reste elle-même miroir invisible” (I&I, p. 21).

E-kerz treizh ar sell etrezek an doueel e tarvez difoupadur an arrizh evel un dirfeud : ouzhpenn chom a-sav, sonnañ, e teu ar sell da anaout an arrizh evel ar pep uhelañ ha da goll meur eus nep tu-hont. An arrizh a werc'henn an erdant brasañ a oufe ar sell da gaout.

“Evit ma c'hallfe an arrizh lenañ ar sell e rank da gentañ ar sell sonnañ. [...] Ar sell arrizher ned eo ket evit arzaelañ e arrizh dre ma ne biao mui an araez d'e ober : e erdant en deus tizhet ur savlec'h gouzalchet diouzhtu gant an arrizh, pennlein ma'z a divi pep erdant. Padal, pezh a ra d'ar sell bezañ arrisheiat, ac'hoel da gentañ, ne oufe dont eus un dibab divezel, met an azon eo d'ur meni skuizhvez voniek. Ar sell ne godian nemet e kement ma tiskuizh eus bec'h ur bukerezh da wintañ hep termen na paouez na diwezh [...]. Gant an arrizh e vez douaret ar sell. E se e ve distalvoudet an arrizh, a-dal d'un diskuliadur, nann pa astennfe d'ar sell un arvest digantreizh, met da gentañ peogwir e kinnig dezhañ ul lec'h da ziskuizhañ. Gant an arrizh, an drec'h diwel ne zegemer diahont ebet, dre ma ne c'hell ket ar sell gwintañ uheloc'h e vukerezh. E se e verk an drec'h diwel, ent nac'hek, fillidigezh an erdant — an dreistbuk, ent dik an dreisterdant. Deraouiñ a ra an hewel el lec'h ma paouez an erdant. An arrizh ne zarbenn diwel ebet, da gentañ pa goach outañ e unan e arc'hwel drec'h diwel, e sked e c'houlou, d'an eil pa vez o tigeriñ en tu all — o serriñ kentoc'h — muioc'h c'hoazh eget an diwel, an dreistbuk. Rak an

diwel a rafe goulakaat e c'hell un erdant teñval c'hoazh emastenn evit e zigeriñ. Diwar neuze e c'haller despizañ parfeted ha bevennoù an arrizh : ennañ e tarvez ent hewel donedigezh werc'hek an doueel spiet gant selloù an dud ; nemet e vez an kez donedigezh a vent gant pezh a c'hell dougen ar selloù-mañ-selloù, gant ar pezh a hewded a c'houlenn pep erdant da anzav bezañ leuniet ; e berr, donedigezh an doueel ne zarvez en un arrizh nemet mar sonn sell an den ha, dre se, mar digor lec'h un nevedenn.”

“Pour que l'idole puisse le fixer, le regard doit d'abord se figer. [...] Si le regard idolâtrique n'exerce aucune critique de son idole, c'est qu'il n'en a plus les moyens : sa visée culmine sur une position qu'occupe aussitôt l'idole, et où s'épuise toute visée. Mais ce qui rend un regard idolâtrique ne saurait, du moins d'abord, relever d'un choix éthique : il révèle une manière de fatigue essentielle. Le regard ne se dépose, qu'autant qu'il se repose — du poids de tenir la hausse d'une visée sans terme, repos ni fin [...]. Avec l'idole, le regard s'enterre. L'idole se disqualifierait ainsi, face à une révélation, non point parce qu'elle offrirait au regard un spectacle illégitime, mais d'abord parce qu'elle lui propose où (se) reposer. Avec l'idole, le miroir invisible n'admet aucun au-delà parce que le regard ne peut augmenter la hausse de la visée. Le miroir invisible marque ainsi, négativement, la défaillance de la visée — proprement l'invisible. Le visible commence là où cesse la visée. L'idole n'admet aucun invisible, d'abord parce qu'elle se dissimule sa fonction de miroir invisible, dans l'éclat de sa lumière, ensuite parce qu'au-delà d'elle s'ouvre — ou plutôt se referme — plus encore que l'invisible, l'invisible. Car un invisible supposerait d'abord que s'y étende, pour l'ouvrir, une visée encore obscure. — Dès lors, peuvent se définir le sérieux et les limites de l'idole : en elle, le divin advient effectivement dans la visibilité que guettent les regards humains ; mais cette advenue se mesure à ce que peut supporter la portée de tels ou tels regards humains, à ce que chaque visée sait exiger de visibilité pour s'avouer comblée ; bref l'advenue du divin ne se fixe dans une idole, que si le regard de l'homme se fige, et, ainsi, ouvre le lieu d'un temple” (I&I, pp. 22-23).

Amañ hon eus d'ober gant ar gravez adanvet naturel e teologiezhoù 'zo pe, evit komz evel HEIDEGGER, gant an nevet e kement ma'z eus anezhañ un ampar d'ar boud (sl. KIS-563, La-11, p. 406 n.). Kemm a venn lakaat J.-L. MARION etre kravezel ha kenedel, etre an idoloù savet gant ar pobloù o azeul hag oberoù an arz, anat en diforc'h etre sell an arrisheiad a volumas an idol ha sell gweladenner mirdi an “arzoù kentidik”.

“An arrizh enta a rezhenn an doueel diouzh muzul ur sell den. Drec'h diwel, merk an dreistbuk, e tleer e zec'havaelañ hervez e gefridi hag e briziañ hervez barr diraez an kez kefridi. Neuze hepken ez eo katreizh klask derc'henn petra, hañvalenn petra eo an derc'h danvezel roet gant an arz d'an idol. Respont : ne zerc'henn netra, nemet e tiskouez ar rez tizhet gant ur gourlen eus an doueel ; hañvalout a ra ouzh ar pezh eus an doueel a vuhezas sell an den. [...] Ar maen, ar prenn, an aour, pe ar pezh a garor, a glask gouzerc'hel e rezh un derc'h sonn al lec'h bet merket gant ar sell sonnet. Hag an esmae, spouronus koulz ha goursavus, en deus sonnet ar sell a zlefe kevannodiñ ar maen evel m'en deus kevannodet sell an arzour kravezel. [...] An idol a rezhenn hag a vir en e zafar ar sked ma sonn as ur sell, da c'hortoz ma anavezfe selloù all sked un hewel kentañ d'o sonnañ en o erdant olañ. [...] An idoloù n'int ket arun gant an delwennoù ez int a-du-rall, prouenn da se an didenn eo dimp dilezel an idolerezh, pa chom vak hon sell o weladenniñ un nevedenn pe ur mirdi — kement e ra diouer e seurt gweladennoù an erdant a c'hortozfe bezañ leuniet, sonnet enta, kement e vez an arouezioù maen ha livioù o c'hortoz, en o selloù mut, ma teufe betek enno selloù bev trellet adarre gant ar sked a rezhennont. Alies n'hor bez ket, n'hor bez mui, an araez da ren seurt saezhennusat idolerezh.”

“Donc l'idole consigne le divin à la mesure d'un regard humain. Miroir invisible, marque de l'invisible, elle doit s'appréhender d'après sa fonction et s'évaluer selon la portée de cette fonction. Alors seulement, il devient légitime de s'enquérir de ce que représente, de ce à quoi ressemble la figure matérielle que l'art humain donne à l'idole. Réponse : elle ne représente rien, mais présente un certain étiage du divin ; elle ressemble à ce que le regard humain a éprouvé du divin. [...] La pierre, le bois, l'or, ou ce qu'on voudra, tente d'occuper d'une figure fixe le lieu qu'a marqué le regard figé. Et l'émoi, terrorisant autant que ravissant, qui a figé le regard devrait investir la pierre comme il a investi le regard de l'artiste religieux. [...] L'idole consigne et conserve en son matériau l'éclat où un regard se figea, dans l'attente que d'autres regards reconnaissent l'éclat d'un premier visible qui les fige en leur ultime portée. [...] Les idoles ne coïncident pas avec leurs pures et simples statues, c'est ce que prouve la facilité avec laquelle nous désertons l'idolâtrie, quand chôme notre regard, visitant tel temple ou tel musée — tant manque à ces visites la visée dont l'attente pourrait s'y laisser combler et donc figer, tant les signes de pierre et de couleurs attendent-ils, en des regards muets, que parviennent jusqu'à eux de

vivants regards, qui s'éblouissent à nouveau de l'éclat resté consigné. Souvent, nous n'avons pas, ou plus, les moyens d'une aussi splendide idolâtrie" (I&I, pp. 24-27).

Moarvat ned eo ket echu evit kelo oadvezh an arrizhoù. Ma ne sav mui hon c'hemprediz o daoulagad war-du idoloù maen pe aour, ez eo poblet hon bed gant arrizhoù : ar ger end-eeun a gaver e genou ar re yaouank ; "c'est mon idole", emezo a-zivout un dremmourez pe ur c'haner *variétés*¹. Hevelep idolerezh avat ne amc'houl ket ar monet etrezek an doueel a zo prepoz levr J.-L. MARION. An arrizh kravezel diwezhañ o vezañ en hon amen hervezañ — ha c'hoazh emañ en e serr noz — eo meizad Doue evel ma'z eo danzeet abaoe ARISTOTELES ha PLATON.

"Mar dioueromp, ni Kornogiz bet ganet (ha bastet) gant peurglozadur ar metafizik, an araezioù kenedel da gaout krog en arrizh, e chom ganimp re all, hag int en o bleuñv zoken. Ar meizad da skouer. [...] Pa vez un devezout prederel o tezgeriañ, eus pezh a ra « Doue » anezhañ, ur meizad, ez arc'hwel ar meizad-se tre evel un arrizh [...]; an devezout a sonn ha naouiñ a ra meizad arrizhek « Doue » ma toug an devezout barnedigezh warnañ e unan kent eget war Doue. Arrizhoù meizadel ar metafizik ne bennleinont e par ar causa sui (evel ma verk Heidegger) nemet e kement m'o deus derc'hoù an onto-teo-logiezh embreget holl da reziennañ en ur meizad gourlen uhelañ o lanv etrezek an doueel (Platon, Aristoteles), neuze an Doue kristen : e se, arrizh meizadel ar « moralischer Gott, an doue divezel » (Heidegger) a zeu da grennañ dremmwel an dec'havael kantek eus Doue — « ... raklakadur un aozer divezel eus ar bed » — kenkoulz all eus « marv Doue » peogwir, gouez da Nietzsche e unan, « Im Grunde ist ja nur der moralische Gott überwunden, a-benn ar fin n'eo distrec'het nemet an doue divezel ». En daou zegouezh, hini an doueouriezh evel hini ar seurtanvet « andoueouriezh », e teu muzul ar meizad nann eus Doue, met eus bukad ar sell. Ken ma talvez amañ ivez penn da benn meno Feuerbach : « mab den eo zo pimpatrom d'e arrizh ». Marteze e c'hallfed diwar se spurmantiñ perak emañ dre c'henezh e piaou an arrizh prientiñ e serr noz. Ur serr noz hennezh hor befe a-walc'h buhezetañ div wech : da gentañ ent kenedel, ur wech tavet an darganoù, er c'houlzad ma voe disflammet gant sked ar Sklerijennoù hini ar signa dornaozet ; ha hiziv, e heol du an nihilouriezh, ma seblantomp dieubet, pe

¹ *Le livre des idoles des années soixante* zo o paouez dont er-maez en Éditions Ouest-France.

hepken forc'het ha dishêret « diouzh al levrioù hag an Derc'hoù, an Idoloù hag o beleion » (C Claudel).»

“Si nous manquent, à nous occidentaux datés (et dotés) de l'achèvement de la métaphysique, les moyens esthétiques de saisir l'idole, d'autres nous demeurent, ou même s'épanouissent. Ainsi le concept. [...] Quand une pensée philosophique énonce, de ce qu'elle nomme alors « Dieu », un concept, ce concept fonctionne exactement comme une idole [...]; la pensée se fige, et paraît le concept idolâtrique de « Dieu » où, plus que Dieu, c'est elle-même qu'elle juge. Les idoles conceptuelles de la métaphysique ne culminent dans la *causa sui* (comme le marque Heidegger), qu'autant que les figures de l'onto-théologie ont toutes entrepris de consigner en un concept l'étiage ultime de leur avancée vers le divin (Platon, Aristote), puis le Dieu chrétien : ainsi l'idole conceptuelle du « *moralischer Gott*, du dieu moral » (Heidegger) limite-t-elle l'horizon de la saisie de Dieu par Kant — « ... la présupposition d'un auteur moral du monde » — comme aussi bien de la « mort de Dieu » puisque, de l'aveu même de Nietzsche, « *Im Grunde ist ja nur des moralische Gott überwunden*, au fond seul le Dieu moral est dépassé ». Dans l'un et l'autre cas, dans celui du théisme comme du prétendu « athéisme », la mesure du concept ne provient pas de Dieu, mais de la visée du regard. En sorte qu'ici aussi vaille pleinement le jugement de Feuerbach : « c'est l'homme qui est le *modèle original* de son idole ». Peut-être pourrait-on ainsi entrevoir pourquoi il appartient constitutivement à l'idole de préparer son crépuscule. Ce crépuscule, nous pourrions l'avoir éprouvé deux fois : d'abord esthétiquement, une fois tus les oracles, à la saison où l'éclat des Lumières a offusqué celui des *signa* forgés à la main ; et aujourd'hui, que, au soleil noir du nihilisme, nous paraissions délivrés, ou seulement privés et déshérités « des livres et des Idées, des Idoles et de leurs prêtres » (C Claudel)” (I&I, pp. 26-27).

AN ARLUN

Goude deskrivañ lanv ar sellout lusket gant e erdant d'an doueel hag, ur wech tizhet e c'hourlen, kouezhet en e ziskuizh, gremm fiñvek an erdant o sonnañ e trellidigezh an arrizh, e stag J.- L. MARION da zanevellañ un imram all. Hervez hon feiz pe hon anfeiz ez eo an idol un darvoud treizhid en hon c'herzhed trema Doue¹ pe un touell hep mui, frouezh d'ur c'hammzerc'hañ a gentidion.

¹ Kounaomp gwerzennoù Guillaume APOLLINAIRE e kentañ barzhoneg *Alcools* :

“Dormir parmi tes fétiches d'Océanie et de Guinée

Gouestlet eo an eil lodenn eus ar pennad da ziskouez penaos e ro ar feiz an dro da rezhiennañ an doueel en un doare all. Ar rezhiennoù ez eo an ikonoù a ra d'ar sell, nann trellañ ha sac'hañ, met luskañ en tu all gant hentoù nevez, dazhentiñ. Diwar vont, merkomp ne sell J.- L. MARION e tro ebet evel lodek er “rouantelezh nad eo ket eus ar bed” nag an ikonoù na gwerc'henn gantouezel pe gantaezel ebet, en eneb enta d'ar pezh a ra Michel HENRY (sl. KIS-563, La-11, pp. 405 hh.). Mar o deus an arlunioù kristen talvoudegezh evit ar feiz ez eo dre zaveiñ, hag int hewel, d'an diwel. *Diwel* amañ zo, dre ledanviñ, koulz ha *dihaez* ha daoust da haeradenn Michel HENRY emañ an *emhaeziñ* lodek kaer en hewel hag, e se, ar *C'hantaezañ*, mar *gentañ* ve, ne oufe ket parzhiañ en diwel trehontus war zigarez ma heptreug ar skiantennoù.

*“An arlun ne zisoc'h ket eus ur welidigezh met he dec'han a ra. An arlun na weler ket met naouiñ a ra pe, kezivikoc'h, hañvalout ouzh..., er ster ma sebez Priam dirak Akilles e Homeros [...] : n'eo ket Akilles unan eus an doueoù, nemet e naou evel un doue, e hañval ouzh un doue. Ennañ, koulz lavarout, e sav d'an hewel un dra bennak piaouel d'an doueoù dres hep ma sonnfe dre se doue ebet en hewel. Endra zisoc'h an arrizh eus ar sell buket outañ, an arlun a engalv ar gwelout, en ur lezel an hewel (amañ Akilles) da beurvec'hiañ tamm ha tamm gant an diwel. An diwel a hañval, a naou e ser un hañvalout (*ei[kw/*e[ioka) n'en dire koulskoude nepred da goumm gourlen an hewel. Pell diouzh ma ve an hewel oc'h araokaat evit aloubiñ an diwel, evel ur jiboez nad eo ket bet — c'hoazh — gwelet hag en defe ar sell d'e zifourkañ dre un hemolc'h forzhus, e lavarfed kentoc'h e vez an diwel oc'h argerzhañ betek e-barzh an hewel, dres dre benn ma tinaoufe an hewel diouzh an diwel. [...] Er ster-se, ar c'herienn arloet gant Sant Paol ouzh ar C'hrist : “arlun an Doue diwel” (Kol. 1, 15) a zle talvout dimp da reolad ; bez' e tle zoken bezañ hollekaet da gement arlun 'zo, evel ma kred ober ent ezpleg Yann Damask : “pep arlun a erzerc'h ar rin hag ar meneg anezhañ eo”. Rak ar pezh a vez lavaret amañ eus ar C'hrist hag eus Doue a zleer intent eus pep arlun [...] — arlun nann eus an hewel, met anat eus an diwel. A endalc'h enta e chom an diwel, hag eñ erouezet gant an arlun, diwel bepred ; nann diwel evel pa vije dreist diraez ar bukad (dreistbuk), met peogwir ez eus anv da hewelaat an diwel kement ha henn — an anendremmadus [...]. An arlun a glask [...]*

Ils sont des Christ d'une autre forme et d'une autre croyance
Ce sont les Christ inférieurs des obscures espérances”

kevaraezañ an hewel da zaveiñ dizehan da estregetañ, hep ma ve koulskoude derc'hennet ennañ an estregetañ-se nepred. E se, an arlun ne ziskouez, ent strizh, netra. [...] Dereizhañ a ra ar sell, ne baouez ket ag e zifaziañ evit ma savfe a hewel da hewel betek goueled an anvevenn war-benn kavout eno traoù nevez. An arlun a engalv ar sell da emzistremen hep englenañ nepred ouzh un hewel, pa na zeu erouez an hewel amañ nemet en amboaz an diwel. Ar sell ne c'hell na paouez na gouzediñ mar sell ouzh un arlun, hogen bepred e rank dazhentiñ ouzh an hewel, evit sankañ ennañ a-enep strumm anvent an diwel. Er ster-se, an arlun ne hewela nemet dre enaouiñ ur sell anvevenn.”

“L'icône ne résulte pas d'une vision mais la provoque. L'icône ne se voit pas, mais apparaît, ou plus primitivement paraît, à l'air de..., au sens où en Homère, Priam se stupéfie d'Achille [...] : Achille ne compte pas parmi les dieux, mais il paraît comme un dieu, comme le semblant d'un dieu. En lui, pour ainsi dire, monte à la visibilité quelque chose de propre aux dieux, sans que, précisément aucun dieu ne se fixe ainsi dans le visible. Tandis que l'idole résulte du regard qui la vise, l'icône convoque la vue, en laissant le visible (ici, Achille) peu à peu se saturer d'invisible. L'invisible semble, apparaît dans une semblance (*ei/kw/*e/ioka) qui pourtant jamais ne le réduit à la vague étale du visible. Loin que le visible avance à la conquête de l'invisible, comme un gibier non — encore — vu que le regard débusquerait d'une conquête forcée, on dirait plutôt que l'invisible procède jusque dans le visible, précisément parce que le visible procéderait de l'invisible. [...] En ce sens, la formule que saint Paul applique au Christ : “icône du dieu invisible” (*Colossiens*, 1, 15) doit nous servir de norme ; elle doit même se généraliser à toute icône, comme s'y risque d'ailleurs explicitement Jean Damascène : “toute icône manifeste le secret et l'indique”. Car ce qui se dit ici du Christ et de Dieu doit s'entendre de toute icône [...] — icône non du visible, mais bien de l'invisible. Ce qui implique donc que, même présenté par l'icône, l'invisible demeure toujours invisible ; non pas invisible parce qu'omis par la visée (invisible), mais parce qu'il s'agit de rendre visible cet invisible comme tel — l'invisageable. [...] L'icône [...] tente [...] de permettre que le visible ne cesse de renvoyer à un autre que lui-même, sans que cet autre ne se reproduise pourtant jamais en lui. Ainsi l'icône ne montre-t-elle, à proprement parler, rien [...]. Elle en remontre au regard, donc ne cesse de le corriger afin qu'il remonte de visible en visible jusqu'au fond de l'infini pour y trouver du nouveau. L'icône convoque le regard à se surpasser en ne se figeant jamais sur un visible, puisque le visible ne se présente ici qu'en vue de l'invisible. Le regard jamais ne peut se reposer, ni (se) déposer s'il regarde une

icône, mais toujours doit comme rebondir sur le visible, pour remonter en lui le cours infini de l'invisible. En ce sens, l'icône ne rend visible qu'en suscitant un regard infini" (I&I, pp. 28-30).

Ha ken pell-se emañ diouzh *diwel* M. Merleau-Ponty an *diwel* a ra J.-L. Marion anv anezhañ e sigur an arrizh hag an arlun ?

~ MMP a laka ne zalc'h ar bed en hewel nemet dre berzh an diwel, “nann un diwel dre zevoud evel un ergorenn kuzhet a-dreñv un all, nann ur peurziwel n'en dije tra d'ober gant an hewel, hogen an diwel *eus* ar bed-mañ, an hini a annez ennañ, en souten hag en gra hewel, e vezusted diabarzh ha piaouel, ar Boud *eus* hevelep beziad” (V.I., p. 198, sl. KIS-524, La-11, pp. 119-120). Pennaenn ar Voudoniezh eo an diwel, lec'h enmanus an *derc'hoù* — ar re-mañ o tennañ da *Zerc'hoù* bezhel PLATON, gant an diforc'h ez int bedel — techet on da lavarout : an dierouez evel alf d'an erouez, lec'h eskoriñ an *derc'hoù*, ha da gempenn bomm diwezhañ frazenn MMP usveneget : “ar *bezus* *eus* hevelep beziad”. MMP a geveneb ouzh an *derc'hoù* diwel an dezevoù soliadet lodek en hewel : “un dezev soliadet zo ar pezh ez eo, hogen dres ned eo nemet se hag er feur-se ned eo ket evit hon lenañ. Prim ez a larkoc'h ar spered dibilh. An *derc'hoù* sonrezhel pe haezel, dres pa'z int nac'hadelezh pe ezvezañs lec'hiennek, n'o fiaouomp ket, int hon piaou” (V.I., p. 188-199 ; sl. KIS-524, id., p. 120).

~ Damheñvel eo lavar JLM, pa skriv da skouer : “e lavarfed kentoc'h e vez an diwel oc'h argerzhañ betek e-barzh an hewel, dres dre benn ma tinaoufe an hewel diouzh an diwel” (sl. p. 432 a-zioc'h) ; ur ster all avat a ro d'ar “mont larkoc'h” a ra ar spered : endra na ro MMP d'ar mont pal ebet, dremmwel ebet estreget hini ar bout/d, ne venn JLM e intent nemet a-geñver gant an doueel — hep bezañ ken gwellaour ha MMP a-du-rall, rak “prim” ha “dibilh” ned a ket ar speredoù diouzh ar soliadoù ma'z int lenet, ha pa ve ar re-mañ “dezevoù soliadet” pe “arrizhoù”. An diforc'h pennañ, boniek, avat etre an daou aozer eo e laka JLM *trehontus* e-lec'h ma intent MMP *enmanus*. Mard eo evito o daou an diwel kalon ar bed, e ra MMP anezhañ ar Bout/d, pal an anaout ha diazez ar preder, e wel JLM ennañ un nor enmanus sko war un diwel *trehontus*.

Ar gudenn o sevel amañ adarre eo hini harzoù ar Brederouriezh. Ha degemer a zleer ur wech da vat an disparti graet gant HEIDEGGER : d'ar Brederouriezh aferioù ar bout/d, d'an Deologiezh aferioù ar feiz ? Hogen “an doue oc'h erzerc'hañ evel an nevet, eleze e-barzh dremmwel anadennoniel argraf ar bout” (sl. KIS-563, La-11, p. 406 n.) a vez oc'h anadiñ ivez en amgant ar feiz evel arrizh trellus, frouezh da skuizhvez ar sellout ; e roud zo dezhañ roud ar feiz en e zerou, sell ar feiz avat o trebarzhiñ pep danvez doue, o tizarbenn pep skuizhvez ha pep trelladenn. Hent ar feiz ? Diskar an

holl arrizhoù, holldrebarzhusted ar sell zo ret met nann spirus : d'ar gwellañ ez int hent an *advaita*, an “andaouelezh” en tu all d'ar *ma#ya#*, eleze da vezevelladur touellus hollad ar beziadoù, hag, a-benn ar fin ne guitaer ket “dremmwel argraf ar boud” — gant gwir abeg e reer eus ar *Veda#nta* ur brederouriezh. An hent etrezek an doueel boutin d'an holl gravezioù ne zeu da vezañ hent ar feiz nemet mar deu an doueel war arbenn d'ar monedad. Ha respont a ra kement-mañ d'hon aters ha dervaat skaradur HEIDEGGER ? Unan eus e ziskibion, pellaet dioutañ gwir eo, LEVINAS ne dermas ket da ziazezañ e breder war an “estreget bout”¹. An traoù n'int ket ken eeun ha m'o disklerie mestr kozh Freiburg enta. Rak ma n'eo ket “eus ar bed” rouantelezh ar C'hrist, an dud o deus feiz enni zo er bed hag o feiz, evit bezañ tro ouzh an diwel trehontus, a gemer korf er beziadoù, zo lodek er bout, dre se a angorzh ar Brederouriezh. An ikon zo unan eus ar beziadoù-se kenderc'het gant ar feiz en amgant ar bout hag ar preder. Outañ e tenesa J.- L. MARION hervez div forzh :

~ ar forzh kentañ eo an hini en deus graet dimp heuliañ er pajennoù kent, nes d'an hent nac'hek, *apofatek* : o loc'hañ diouzh ar c'hrazezioù “kentidik”, diskouez ez eo an idol estreget un derc'henn ; d'an eil dienaar ez eo an ikon estreget un idol ; azdoublañ er preder ar c'herzhed war an dachenn, an idoler o vont betek e zoue trellus, an den a feiz o tistremen pep arrizh hag o kehelañ e ikon evel an nor digor war-du ar C'hrist ;

~ an eil forzh eo hini an testeni, mont a ra da vuhezadoù an dud a feiz evel m'en danevellont war-benn digej un danvez a c'hallfe ar preder kaout krog ennañ. Ar seurt argerzh n'eo ket nevez. Pleustret e vez endeo e-keñver ar Varzhoniezh : daou dra disheñvel eo bezañ prederour ha bezañ barzh — evel ma lavar HEIDEGGER, “ez eo preder ha gweud annezet war ar menezioù disrannetañ” — e kembeli ar prederour avat emañ komz a Varzhoniezh, gant ma trofe e evezh ouzh ar genel barzhoneg ha n'eo ket ouzh “feiz” pe “awen” ar barzh. Dre ar forzh-mañ ivez e tiwanas an Anadennoniezh : goude lakaat ez eus ur c'hrediñ eus an dodañ bed e kreizas HUSSERL preder e vuhez war modoù an dodañ. Heñvel dra ez eo kantreizh d'ar prederour stiañ e sell war selloù an den a feiz met nann war ar feiz o goustenn. Div skouer a glaskin reiñ da heul J.- L. MARION eus argerzh ar prederour er forzh-mañ.

AN ARLUN HAG AN AROUEZ

Hervez Sened 860 : “Ar pezh a lavar dimp al levr dre ar ger, an ikon en degemenn dimp dre al liv hag en laka *erouez* dimp². Evel ma ne dremen ur varzhoneg

¹ Kv. an titl a roas LEVINAS da unan eus e levrioù : *Autrement qu'être, ou au delà de l'essence*, Nijhoff, 1974 ; ademb. L. de poche, 1990.

² Trugarekaat a ran Gab CHEREL ha Louis LEMOINE a zo bet hegarat a-walc'h da bourchas din testennoù Michel & Paul EVDOKIMOV war gehelerezh an ikonou.

eus ur yezh d'unan all nemet oc'h adkouezhañ en ur varzhoneg nevez, ez eo an ikon an adkouezh e stumm livioù eus gerioù an Diskuliadur. Evel ma engalv ar gerioù da vont don ouzh don, pep gwiskad ster o vezañ an arhent d'ur gwiskad donoc'h, ez engalv an ikon da sankañ dindan gorre hewel al livioù, pep gorre liv o vezañ an arlun d'ur gorre donoc'h, pep hewel o kaout da gefridi daveiñ d'un diwel en tu all bepred.

“En ikon emañ stalet danvez ar prenn hag al liv en doare ma naoufe ennañ erdant ur sell, trebarzhus, o tiplukañ dioutañ. Nemet, a arbennfe ur selaouer diwar skañv, o tespizañ an ikon dre vukad un erdant, dre ur sell enta, ha ne adkaver ket termenou dik despizadur an idol ? Hep mar ebet, hogen war-bouez ur ginadur krenn : piaouer ar sell amañ n'eo mui an den o vukañ betek an hewel kentañ, un arzour nebeutoc'h c'hoazh ; an kez sell zo piaou an ikon e unan, ma ne zeu an diwel da hewel nemet diwar erdant, dre berzh e vukad enta. Mard eo an den, dre e sell, a lak gallus an idol, ez eo en eneb sell an diwel, a-werc'houez, a vuk ouzh an den pa vez hemañ oc'h arvestiñ gant azaouez an ikon. An ikon a sell ouzhimp — hon angorzhañ a ra dre ma lez erdant an diwel da zarvezout ent hewel. [...] Digor emañ an ikon war un dremm, ma ne endremm gweled an den netra, nemet e sav ent anvevenn eus an hewel d'an diwel dre c'hras an hewel end-eeun : e-lec'h an drec'h diwel a zisvanne ar sell denel dezhañ e unan, o verzañ an dreistbuk, emañ an ikon digor e rezh un dremm a sell ouzh hon selloù evit o engervel etrezek he donder. Eomp betek penn : an ikon hepken a ziskouez dimp un dremm (gant gerioù all, pep dremm a emro evel ikon). [...] War-lerc'h an drec'h diwel ma sonn ar sell, digorded un dremm ma isfont ar sell denel, kouviet da welout an diwel. [...] Gant an arrizh e sonn sell an den en e velezour, gant an arlun e tiank sell an den er sell diwel en endremm ent hewel.”

L'icône dispose la matière du bois et de la peinture en sorte qu'y paraisse l'intention d'un regard, transperçant, qui en surgit. Mais, objecterait un auditeur superficiel, en définissant l'icône par la visée d'une intention, donc par un regard, ne retrouve-t-on pas exactement les termes de la définition de l'idole ? Absolument, mais à une parfaite inversion près : le regard n'appartient plus ici à l'homme qui vise jusqu'au premier visible, encore moins à un artiste ; un tel regard ici appartient à l'icône même, où l'invisible ne devient visible, qu'intentionnellement, donc par sa visée. Si l'homme, de son regard, rend l'idole possible, dans la contemplation révérente de l'icône, au contraire, le regard de l'invisible, en personne, vise l'homme. L'icône nous regarde —

elle nous *concerne*, en ce qu'elle laisse advenir visiblement l'intention de l'invisible. [...] L'icône s'ouvre sur un visage, où la vue de l'homme n'envisage rien, mais remonte à l'infini du visible à l'invisible par la grâce du visible lui-même : au lieu du miroir invisible, qui renvoyait le regard humain à lui seul, et censurait l'invisible, l'icône s'ouvre en un visage, qui regarde nos regards pour les convoquer à sa profondeur. Il faut même risquer que seule l'icône nous montre un visage (autrement dit que tout visage se donne comme icône). [...] Au miroir invisible où se fige le regard, succède l'ouverture d'un visage où le regard humain s'engouffre, convié à voir l'invisible. [...] Dans l'idole, le regard de l'homme se fige en son miroir, dans l'icône, le regard de l'homme se perd dans le regard invisible qui visiblement l'envisage (I&I, pp. 31-32).

Dindan bluennadur peurfonn J.-L. MARION (nobody is perfect !), ha ne adkaver ket pezh a stader dirak barzhonegoù pe daolenoù ? Reoù anezho renet evel kurioù en amboaz trelañ al lagad, arrizhoù hep mui, re all oc'h emzerc'hel disked, evel mut ha boull a-dal d'ar sell, selloù o unan o tont war arbenn dezhañ hag o tigeriñ donderioù na baouezet ket a sankañ drezo etrezek an diwel ? E se e kavan diaes heuliañ an aozer pa skriv : “An ikon pa denn e berzhegezh eus ergerzhadur an donder anvevenn, n'emañ ket, muioc'h eget an idol kadarnaet gantañ amañ da nebeutañ, e dalc'h domani an arz. [...] Ar skulter a rezhien er maen sked an doue, hewel kentañ [...]” (I&I, p. 35). Damheñvel dezenn a glever gant P. EVDOKIMOV pa gav mat kevenebiñ ikon ha taolenn, o lezel hepken gant houmañ ur roll “sonnañ, derc'hennañ ent weledele un dra bennak n'eus mui anezhañ (e kement ha plegenn louet kounaet) ha dre se bezañ test da ezvezañ pe da anvezoud ar pezh a zo derc'hennet” (*L'Orthodoxie*, p. 223). An oberoù arz ivez zo da rannañ etre arrizhoù hag arlunioù. D'ar varzhoneg diles, d'an daolenn diles, h.a. eo hep mar ebet dedalvezadus pezh a skriv P. EVDOKIMOV a-zivout an ikon : “[...] en e argelegezh, e tiraer e apofategezh dezhañ, lemel a ra nep skeudennadur, ne ro tresadenn ebet eus an trehontus, n'en « traela » ket, tresañ a ra ar vezañs, hag e reolennoù strizh a ziwall ar speredel diouzh pep ergoreladur dre ar merzhadoù” (*id.*, *ibid.*). Moarvat ned eo ket ar prederour evit mont pelloc'h eget rummañ an ikon hag an oberenn diles en hevelep savlec'h eus armerzh an hewel hag an diwel ; e piaou an den a feiz eo merkañ an derezioù ret ha, mar kav reizh, gwelout e kenderc'hadoù an arz “les Christ inférieurs des obscures espérances” — gant ober eus e briziadenn ur afer a feiz ha n'eo ket unan a voutikl...

AN ARLUN HAG AR MEIZAD

Goude diskouez an “Doue *causa sui*” evel arrizh meizadel, e teu gant an aozer an aters : pe zarempred a c'hell an arlun skoulmañ gant ar vezadelezh ?

“An arlun a c'hell argerzhañ dre ar meizad ivez, ac'hoel gant ma asantfe ar meizad na veizañ an anvezadus [...]. Met dres, hag ergrafañ a c'haller seurt meizadoù ? N'eus evit talvoud da skor — heveiz — d'an arlun nemet ur meizad oc'h asantiñ bezañ muzuliet hervez dreistmuzul an diwel o tont hewel dre an donder anvevenn, o lavarout enta pe o prometiñ lavarout an kez donder anvevenn ma'z a kennevin hewel ha diwel. Pa stad Descartes ez eo idea Dei koulz hag idea infiniti hag « e rank houmañ da vezañ gwir bezañ anvezet e pep doare, seul gent ma'z eo entalet an anvezadusted end-eeun gant poell furmel an anvevenn », e tiskouez dimp un hent, amezek da nebeutañ : an arlun a c'hourlaka ouzh ar meizad degemer ergerzh an donder anvevenn ; anat eo ne dalvez nemet evel anvevenn, andesaveladus eo enta dre veizad ; padal n'eo ket un anien a zo anv da zesavelañ dre veizad, met un erdant — hini an diwel oc'h araokaat etrezek an hewel hag enskrivet ennañ dre an dave d'an diwel a c'hourlaka ouzh an hewel [...]. Ne dalvez evel arlun nemet ar meizad pe ar stroll meizadoù o nerzhañ koulz an digemmañ hag an uniañ etre hewel ha diwel, o kreskiñ enta an eil seul ma arbouez egile. Pep arvennad d'ar peurc'houzout a sell enta ouzh an arrizh.”

“L'icône peut procéder aussi conceptuellement, pourvu du moins que le concept renonce à comprendre l'incompréhensible [...]. Mais précisément, peut-on concevoir de tels concepts ? Ne peut servir de support — intelligible — à l'icône qu'un concept qui admette de se laisser mesurer à la démesure de l'invisible qui entre en visibilité par la profondeur infinie, donc qui lui-même dise ou promette de dire cette profondeur infinie, où visible et invisible se familiarisent. Quand Descartes établit que l'*idea Dei* se dirait *idea infiniti*, et que celle-ci « *ut sit vera nullo modo debet comprehendi, quoniam ipsa incomprehensibilitas in ratione formalī infiniti continetur* » (*Quinte responsiones*), il nous indique un chemin, au moins voisin : l'icône impose au concept de recevoir le parcours de la profondeur infinie ; à l'évidence ce parcours ne vaut que comme infini, donc indéterminable par concept ; pourtant il ne s'agit pas de déterminer par concept une essence, mais une intention — celle de l'invisible s'avançant dans le visible, et s'y inscrivant par le renvoi même qu'il impose de ce visible à l'invisible [...]. Vaut comme icône le concept ou l'ensemble de concepts qui renforce aussi bien la distinction du visible et de l'invisible que leur union, donc qui accroît d'autant plus l'une qu'il souligne l'autre. Toute prétention au savoir absolu relève donc de l'idole” (I&I, pp. 35-37).

Daou dal zo d'an denesaat ouzh meizadegezh — ouzh ergrafadusted — an arlun. An tal kentañ, meneget gant DESCARTES, eo hini an anvevenn : an arlun evel dor war an anvevenn, a rafen anezhañ an tal jedoniell. “Er Jedoniezh, ar ger *anvevenn* arveret e unan n'en deus ster ebet. En eneb, e c'haller despizañ geriennoù evel « teskad anvevenn » ha bommoù 'zo evel « tennañ war-du an anvevenn », « muianvevenn », « leianvevenn ». Daou arvez zo da geal an anvevenn : an anvevenn galloudel o tec'heriañ un distremenadusted (da skouer, nep niver kentañ zo kevaraez d'unan all d'e heul, n'eus enta bevenn ebet da roll an niveroù kentañ) hag an anvevenn gweredel a zo un « emskiantañ » ouzh an holl elfennoù war un dro eus un teskad anvevenn (teskad ar c'hevanion naturel, h.a.). E-pad pell e voe kondaonet arver an anvevenn gweredel er Jedoniezh” (A. BOUVIER & M. GEORGE, *Dictionnaire des Mathématiques*, 1992, pp. 393-394). Gant gerioù all, evit ar Jedoniezh (hag ar Brederouriezh), ha hep kilañ rak an dislavar en termenoù, ez eo keal an *anvevenn* ur meizad *bevennat*.

An eil tal eo an tal teologek : “An ikon (an arlun kristen) zo dezhañ ur staelad teologek, an dave eus an dremm hewel d'an erdant endremmus o pennleinañ en dave eus ar C'hrist d'an Tad : rak an dezger « ikon an Doue diwel » a zesell ar C'hrist da gentañ”¹. An ikon a vez enta o c'hoari ur roll ketal etre hewel ha diwel, roll ketal a zo ivez hini ar Skritur ez eo an ikon ur rezhienne anezhi. War un dro emañ merket ar vevenn na c'hell ket ar Brederouriezh treuziñ : he domani eo an hewel, an heouez, n'he deus ket d'ober ouzh erdantoù o tont eus an diwel ha pa zeufent war arbenn d'an erdantoù hewel. Hep mar e talvez meizadoù ar Brederouriezh da boent harpañ d'an Deologiezh ha studiennoù evel re J.-L. MARION a gas pelloc'h an erv boulec'het daou vilved 'zo. Enskrivet int er reveulzi o reuziañ an devezout teologek en 20^t kantved gant dismantridigezh an ontoteologiezh. Oc'h ober un arrizh eus meizad an Doue *causa sui* paket e-barzh roued ar preder aristotelek ha nevezplatonek, e stign an aozer kudenn amprestoù an Deologiezh ouzh ar Brederouriezh. E zezrann eus an ikon zo ur skouer splann eus tonkad ar meizadoù amprestet. “An arrizh a lak e greiz kerc'hell en ur sell denel [...]. An ikon [...] a zigempouez gweled an denion evit ober dezhañ isfontañ en donder anvevenn”¹. Pa gomz ur prederour a vezadoù digor, e lak hepken e penn kont dedroadusted an devezout o tigeriñ dizehan selledoù nevez war divoud e breder : meizadoù nevez a gemer lec'h ar re gozh, an holl anezho avat ken soliet ha ken soliet er bed ; mar gra gant meizad an diwel, ez aked da spisaat, evel ma ra

¹ “L'icône a un statut théologique, le renvoi du visage visible à l'intention qui envisage, culminant dans le renvoi du Christ au Père : car la formule « icône du Dieu invisible » concerne d'abord le Christ” (I&I, p. 37).

¹ L'idole place son centre de gravité en un regard humain [...]. L'icône [...] déséquilibre la vue des humains pour la faire s'engouffrer dans la profondeur infinie” (I&I, p. 37).

MERLEAU-PONTY, emañ an dalc'h gant “an diwel *eus* ar bed-mañ”. Hevelep digorded n'eo ket an hini a rank ar meizadoù gouzañv gant an Deologiezh : oc'h enkorfañ enno un diwel “nad eo ket eus ar bed-mañ” e ra hi warno ur freg dreistmuzul a vir outo a glozañ ken, en o displant diwar sol ar gwiriadus e sell d'o adsoliañ war un Diskuliadur angwiriadus ken e paouezont pelloc'h a gaout dremm brederouriel.

Kent echuiñ, un evezhiadenn : katreizh eo evit an den a feiz soñjal e talvez ar Brederouriezh d'ar muiañ da zigeriñ an hent evit an Deologiezh ha se dre c'hoveliañ an devezout. Anvern n'eo ket e ve goveliet a-walc'h an devezout evit ma oufe bep tro dispartiañ ennañ e unan pezh a zo d'ar preder ha pezh a zo d'ar feiz. Rak, goude ar c'hantvedoù ma voe prederouriekaet an Deologiezh, ez eus da virout na ve ar Brederouriezh en arvar un teologekaat. Ar mesk hon eus bet tro da ziskuliañ e testennoù evel re Michel HENRY agentaou a ziskouez n'en doujer ket hep abeg.